


# Spisverkoù ar 5vet



## 622: Hidjra

E 622 : Kuitaat a reas Mahomed hag e gompagnoned ar Meka evit mont da Yathrib ( Medina hiziv-an-deiz) muzulman, pa oa bet kuitaet ar Mekka get Mahomet da).Krogiñ a ra an deiziataer muzulman an deiz-se. An Hidjra (Hegire) a vez graet ag an darvoud-mañ.

## 1096-1099: ar c'hentañ kroaziadeg

Ar-lerc'h galv ar pab **Urban II** en em stollas ar briñsed kristen evit adkemer **Jeruzalem** d'ar Vuzulmaned e 1099.

## XIVvet kantved: Brezel hêrezh

**Breizh**: e-pad **brezel Kant vlez** e tarzh enebiezh e Breizh etre ar re a faot dezhe kaout un emglev get ar Saozon hag ar re o deus c'hoant tostaat ag ar C'hallaoued.

## 1492:kentañ beaj Kristobal Kolon

E 1492 e klask Kristobal Kolon tizhout Azia en ur dremen dre ar c'hornôg. Dizoloiñ a reas ur c'hevandir nevez **Amerika**.


## 1532: Breizh staget

**doc'h Frañs**: àr- lerc'h marv **Anna Vreizh** e ta Breizh da vout staget en doare ofisiel doc'h rouantelezh Frañs

## 1598: skrid-embann Naoned

Asantet e oa bet **ar relijion protestant** get **Henri IV** e **1598** war lerc'h lazhadeg Sant Barthelemy.A-drugarez dezhañ e oa bet achu ar brezelioù relijion e oa bet etre 1562 ha 1598.

600 800 1000 1200 1400 1600 1800



## Xvet-XIIIvet kantved: Maread an ilizoù romanek

Savidigezh ilizoù romanek get ur sevel awenet get an arz romanek( mogerioù tev, frenestroù bihan, bolz-hantergelc'hiek romanek, gwareg ouù torr).

## XII-XVvet kantved: maread an ilizoù gotek

Ilizoù brasoc'h hag uheloc'h, sklêrijennet e vez a-drugarez an teknikoù sevel nevez. Diskouez a ra brasder an Iliz katolik( bolz àr groazigell-volz, **gwaregoù-bount**)

## XVvet-XVIvet kantved: an Azginivelezh

Emsav arzel hag ur preder eo ,ganet en Italia ha ledanaet en Europa a-bezh. Diazezet àr ur sell nevez àr ar bed , **ar mab-den** hag ivez an darempred get Doue ar pezh a gas ganedigezh ur relijion nevez ,**ar brotestantelezh(Luther, Kalvin)**

## 1661-1715: ren Loeiz XIV ha savidigezh ar c'hastell Versailles

Ren hiniennel Louis XIV ; Ar-greñvaat eh a ar **vonarkiezh hollveliel**. Arouez ar galloud hollveliel eo **ar c'hastell Versailles**.

**1675: emsavadeg ar bonedoù ruz**: en em sevel a ra ar Vretoned a-enep kresk an taosoù urzhiet get Loeiz XIV. Flastret eo an emsavadeg get arme ar Roue Heol.

## XVIvet ha XVIIvet kantved: oad aour Breizh

Dont a ra Breizh da vout unan a broioù pinvidikañ Europa, strujus eo an ekonomiezh, stank an eskemmoù

